

306

An fol° 113 recto, titre (écrit au crayon): Banniel Breiz 36

Banniel Breiz

(f° 113 verso)

Na m'ar plizze gant Doue he alfemp hoas gwelet
 Hon goz noblanz ag gante banniel ar bretonnet
 N'hi ha iaffe oll d'he c'heuil ac ha disquennfe choas,
 Petra eo an dud ha breiz ac ing bed ha biskoas.

Meur a Roue a zo bed, ive ar Roue Soz
 ha c'hoante sommel anezy ha daouarn hon tud coz.
 Allas, re diez he voa hini n'he n'heus galled
 Ha breman gant an dud fall cheta hi disharet.

Mez ervu a zo sikour, kersomp d'an od buhan,
 N'hi er goëlo enan savet, ken bro, Prins a Rohan
 Treuzet eo gant-he ar mor, evit dont d'ha souten
 Hon Rouane, hag ar pobl, ac an illis kristen.

Enezdy c'hoas ouz he heuil Beleyen ha noblanz
 Hac ar re zo eveldomp douget d'ha Roue Frans,
 Nak ha dindon ar banniel heuilomp he d'ar brezel
 N'hi a vo gant sikour mad, n'he alfemp kaout goël.

P'ha vo renget an arme red vo he n'hem kanna
 n'hi a heuillo hon pep lec'h niz an dukez Anna.
 Ar victor ha vezo sur Doue hon sikouro,
 Na sull toll he skoimp n'hi, a vo toll ar maro.

P'ha vezo distrujet oll muntreien hon Roue
 Laerron hon illizo ha nacherien Doue,
 N'hi a lakai war e tron Lois an trivarc'hvet
 ha n'hi ha neum bilo c'hoas m'har na ve respectet.

(f° 114 verso)

307

Pa vo renget ar oll traou ag achu ar brezel
he vo ambrouged hon prins gant enor d'he Kastel
Na m'ar deu bec'h d'ar Roue, he kavo choas soudan
Cadoudal ha tud bro Breiz, gwir anvet tor-he-ben.

7

M^{ade} de St. Prip. av: 1851.